

## D'an 12 a viz Here

- War-dro ar bloaz 484, e korn-bro Tunis, merzherenti 4966 sant en o zouez eskibion, sant Kirprian ha sant Felis, beleion, diagoned ha liked. Da-geñver heskinadeg ar Vandaled e voent kaset d'an harlu war urzh ar roue ariat Teodorig dre gasoni evit ar feiz katolik er gouelec'h lec'h ma voent boureviet ha lazhet holl en diwezh.
- E 530, ganedigezh en neñvoù sant Felis IV, pab. Diuzet e 526 e stourmas evit ar feiz o kondaoniñ an dam-pelagianouriezh e senez Aurenja e Bro-C'Hall. Treiñ a reas daou dempl eus ar forum en un iliz en enor d'ar sent Kom ha Damian.
- E 633, sant Edwin, roue Norzumbria. Ur roue pagan e oa anezhañ pa zimezas gant Ethelburg a oa kristen hag a zo bet santelezet ivez. Tamm ha tamm e voe gonezet da feiz e bried hag e voe kelennet gant sant Paolin eskob Evrog. Harpañ a reas diazezidigezh an Iliz saoz o talañ rak paganiezh e genvroidi hag eneberezh ar Vretoned ne asantent ket o stalidigezh er vro. Lazhet en emgann Hatfield e voe sellet outañ evel ur merzher.
- E 2006, d'e 15 vloaz, e Monza en Italia, distro da Zoue ar gwenvidig Carlo Acutis, gwir azeulour hag abostol Kevrinenn an Aoter, diskibl ar Werc'hez Vari, skouer a garitez ha test eus al levenez santel. Emañ e gorf en Assisi.
- Gouel Itron-Varia ar Pilar, patromez ar Spagnoliz.
- Er Vvet-VIvet kantved, sant Kolodan (*Kolodeg, Kae...*), manac'h, marteze eskob, penitiour en Enez-Sun hag e Plougoñ. War a hañval eo bet meur a neved gouestlet dezhañ e Breizh roet dezho gant fazi anv « St-Claude » dezho (Gourin).
- Er VIvet kantved sant Fieg (Iw. Fiach) a Sleibhte (Sletti), eskob en Iwerzhon, bet kensakret gant sant Padrig ma savas ur meulgan (pe zaou) en e enor hag unan ivez da santez Berc'hed.
- Er VIvet kantved, sant Beag Mac De, lesanvet "an Diouganer", kantved, eskob en Iwerzhon.

## D'an 13 a viz Here

- Er bloaz 181, ganedigezh en neñvoù sant Teofil, eskob Antiokeia. Genidik eus kember ar stêrioù Tigr hag Eufratez, e voe unan eus apologeted vrudetañ ar c'hantvedoù kentañ.
- En IIIde pe IVre kantved e Kordoba, merzherenti ar sent Faustus, Genver ha Marsial. Graet e vez anezho "an tri Aotroù" hag a ra evel teir c'hurunenn d'ar gêr.
- En IIIde pe IVre kantved, e Thesalonike e Makedonia, merzherenti sant Florentius, dêvet e voe ez vev goude meur a voureviadur.
- Er Vvet kantved, ganedigezh en neñvoù sant Venant, abad, brudet evit e vurzhudoù. Pa oa yaouank flamm e voe dimezet hogen, fromet gant menec'h Sant-Varzhin e tibabas mont da lodennañ o buhez gant asant e wreg.
- Kounidigezh Itron Varia Fatima. D'an 13 a viz Mae 1917 en em ziskouezas ar Werc'hez da dri bugel o tiwall o deñved, Lúcia de Jesus dos Santos ganet e 1907, he c'henderv Francisco Marto, ganet e 1908, ha Jacinta e c'hoar ganet e 1910. D'o zri, betek an 13 a viz Here, e fizias ar Werc'hez kemennoù a-bouez evit dazont an Iliz hag ar bed.
- E Breizh, er VIvet-VIIvet kantved, sant Baharn, penitiour.
- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Komgan, abad, mab roue ar bobl Laigin e Kilranelagh, breur santez Kentigerna. Abalamour d'ar brezelioù savet er vro ez eas da gaout repu e Bro-Skos gant e c'hoar hag e niz sant Faelan. Eno e savas ur manati.
- En Iwerzhon, santez Fionnseach, maouez santel.
- E 1012, e Meleth en Aostria, merzherenti sant Koulman, misioner iwerzhonat, kehelet bepred e Wien.

## D'ar 14 a viz Here

- E 222, e Roma, merzherenti sant Kalist I añ, pab. Daoust dezhañ bezañ sklavour e voe diagonet ha fiziet ennañ melestradurezh danvez Iliz Roma. Neuze e tiazegas ar vered a zoug e anv war ar Via Appia. Diuzet da bab e 217, e rankas talañ ouzh disivoud Hipolit hag ouzh garventez Tertulian o wevnaat reolennoù degemer ar gatekizidi hag o aesaat pardon ar renavied. Mervel a reas e-kerz un taol-dispac'h en Trastevere, e-lec'h m'eo bet miret an eñvor anezhañ.
- E deroù ar IVre kantved, merzherenti, sant Gaodeñz (Gl Gaudence), eskob Rimini e Romania.
- Er bloaz 760, sant Kosmas, eskob Maïouma e Bro-bPalestina. Hag eñ barzh ha doueoniour e voe manac'h a-gevret gant sant Yann Damask e manati sant Sabbas a-raok bezañ anvet eskob.
- En Iwerzhon, ganedigezh ne neñvoù sant Koulm, manac'h.
- E Breizh, e 1866 e Parame, ar bac'hiadez Mari-Amelia Fristel, ganet e Sant-Maloù e 1798, diazezeur Kongregadur leanezed Kalonoù Santel Jezuz ha Mari.

## D'ar 15 a viz Here

- E 447, ganedigezh en neñvoù sant Sever (Gl. Sévère), eskob Trier, diskibl sant Loup Troyes, keneil sant Garmon da-geñver e gefridi e Breizh, abostolour ar Germaned.
- Er VIvet kantved, sant Leonarzh, penitiour e-kichen ar Mañs lec'h ma vez kehelet bepred.
- E 1582, distro da Zoue santez Tereza Jezuz a Avila, gwerc'hez, karmezadez, adreizherez ar C'harmez, doazhourez eus an Iliz. D'he ugent vloaz ez eas da garmez Kêr-Avila e Bro-Spagn lec'h ma krogas gant adreizhidigezh ar C'Harmez. Diazezañ a reas ouzhpenn tregont kouent gant skoazell sant Yann ar Groaz, daoust d'an enebiezh.
- Er Vvet kantved e-kichen Kolun, merzherenti santez Aorelia, keneilez santez Ursula.
- E Breizh er Vvet kantved, sant Konogan, Iwerzhonad, dilestret e Lezkogan e Beuzeg-ar-C'hab.
- Er VIvet kantved, merzherenti sant Areled, manac'h e Sant-Meven (en eskopti Sant-Maloù), lazhet gant an Normaned.
- Er VIvet kantved bepred, santez Aourell, gwreg sant Meliav, roue, mamm sant Meler ar merzher yaouank.

## D'ar 16 a viz Here

- E 685, sant Mommelin, eskob Noyon. Diazezeur abati Sant-Bertin. Gant e genvroiz sant Bertin ha sant Ebertram ez eas da abati Luxovium ma oa sant Eustaz eontr Bertin an abad anezhañ. Galvet gant Klotar II a Vro-C'Hall da vezañ kelenner el lez e teuas da vezañ mignon sant Eloa. Distro da Luxovium e voe galvet gant sant Omer da ziazezañ gant sant Bertin abati Sithiu ma voe an abad kentañ. Anvet e voe eskob Noyon ha Tournai war-lerc'h sant Eloa.
- E 786 e manati Hersfeld e Frankonia, ganedigezh en neñvoù sant Lull, eskob Mainz. Diskibl sant Bonifacius en e ambrougas en e gefridioù hag e voe eskobet gantañ evit ma vefe ur c'helenner evit ar veleion, un doazhour eus reolenn ar venec'h, ur prezeger hag ur pastor feal evit ar bobl kristen. Mignon e oa da sant Brewen Kêrgent.
- E 1243, santez Hedvija, dugez Silezia, mamm a diegezh ha leanez da c'houde. Dimezet d'he daouzek bloaz gant dug Silezia e reas gant he fried un tiegezh kristen skouerius. Ober a reas war-dro madobererezhioù hag e tiazegas daou ospital. Ur wezh intañvez ez eas en un abati bet diazezet ganti e kêr-dTrebiniz ha renet gant he merc'h Jertruda.
- E 1690 e Paray-le-Monial e Bro-C'hall, santez Marc'harid-Mari, gwerc'hez, leanez eus Urzh ar Weladenn. Aotreet e voe dezhi gwelidigezhioù – etre miz Kerzu 1673 ha miz Mezheven 1675 – ma tegemeras drezo ar gefridi da skignañ kehelerezh ar Galon-Sakr.
- E 1771, e Montréal er C'hanada, santez Mari-Marc'harid D'Youville, diazezeur Ensavadur C'hoarezed ar Garitez e Montreal. He zud a oa a orin eus Mederieg e Bro-Menez-Alban en eskobiezh Sant-Maloù.

- E 740, sant Gwidal (Gl. Viau, Vital), ganet e Breizh-Veur, manac'h war Enez-Her, penitiour e Sant-Widel-Skovrid e Bro-Naoned, abostolour Bro-Rezh.
- E 362 pe 363, merzherenti sant Eliav, manac'h, Iwerzhonad, abostolour ar feiz e Gallia, merzheriet e Toul.
- E 645, distro da Zoue sant Gall (Iw. Cailleach), Iwerzhonad, abad. Bet manac'h e Bangor en Iwerzhon, ez eas da gantañ da Luxovium ma voe diskibl sant Koulman Veur, diazezeur un abati en Helvetia, m'eo paeron ar vro eno.
- E 520, sant Aban (Iw. Abbán, Lt. Abbanus, Gl. Abbain), abad Cill Abbán en Iwerzhon, niz sant Kuñvin (Kevin) Glendalough, pe c'hoazh niz sant Ivar.
- War-dro 686, sant Mombl (Gl Mombles, Momelin, Mummole), eskob Noyon, Iwerzhonad. Bez' e vefe breur ar sent Govan, Gwaznou, Elog ha Boethian. Gant sant Fursa e voe manac'h e Lagny. Reiñ a reas skoazell da sant Omer. Urzhiet e voe gant sant Eloa, eskob Noyon, ha kaset da Chauny. Deuet da vezañ abad Lagny e voe diuzet d'e dro eskob Noyon.
- E 1584, e Wrexham e Kembre, merzherenti sant Richard Gwyn, tad a diegezh. Ganet e 1547 e Montgomeryshire e Kembre e studias e Cambridge hag e tibabas dont da vezañ katolik. Distro d'e vro e timezas hag en devoe c'hwec'h bugel. Digeriñ a reas ur skol. Harzet e voe hakondaonet d'ar marv evel trubard dre ma nac'he anavezout ar rouanez evel penn Iliz Bro-Saoz. Divrall er feiz e voe krouget a dibastellet bev c'hoazh.
- E 708, emziskouezadenn sant Mikael Arc'hael, difennour Breizh hag ar Gelted, war venez Tumm, e Breizh-vihan da vare-se, e rouantelezh Devnon, ha gouel dedi brientiliz Menez-Sant-Mikael.

#### D'ar 17 a viz Here

- War-dro ar bloaz 107, e Roma, merzherenti sant Ignas, eskob Antiokeia. Diskibl d'an abostol sant Yann e rene Iliz Antiokeia, hag eñ eil warlerc'hiad sant Pêr, pa voe kondaonet d'al loened da vare an impalaer Trajan, ha kaset da Roma e 107. E-doug e veaj, tra ma tiwaske ferveder e wardourion, e skrivas seizh lizher da Ilizoù diseurt evit annougañ ar vreudeur da waziañ Doue en unaniezh gant o eskob, hag o c'houlenn ne vefe graet netra evit e virout da vezañ aberzhet evit ar C'hrist. Mervel a reas eta debret gant al loened gouez "malet evel an ed, emezañ, evit dont da vezañ bara ar C'Hrist".
- War-dro 250, e Chartrez e Bro-C'hall, merzherenti santez Solenn pe Solin (Lt. Solina) gwerchez.
- Er IVre kantved, sant Yann Kolobos eleze "ar c'horh", penitiour, tad eus gouelec'h Skete. Ouzhpenn e vertuzioù heverk e voe anavezet dre ma oa un diouganer anezhañ.
- E 475 e Tsurta, e Georgia, santez Shoushanik pe Suzanna, merzherez armeniat. Hag hi armeniaedez ha kristenez, e voe lazhet gant he gwaz ar priñs pagan Varsken dre ma felle dezhi chom feal d'he feiz.
- E 1794, merzherenti santez Marie-Clotilde de Saint-François-Borgia, superiorez Ursuladezed Valenciennes hag he c'heneilezed, lakaet e voent d'ar marv da-geñver an Dispac'h Gall en abeg d'o fealded d'o gouestloù ha da Iliz Roma. Pemp anezho a voe dibennet d'ar 17 ha c'hwec'h all d'an 23.
- Er VIIvet kantved, e Breizh, distro da Zoue sant Gweganton, abad en eskobiezh Gwened.
- Er IVre kantved, sant Riagal (Lt. Regulus, Sz. Riaghail, Gl. Rule), manac'h genidik eus Patras a zegasas relegoù an abostol sant Andrev da Vro-Skos.
- E 720, sant Maonach, manac'h en Iwerzhon.
- E 1675, e Kaodan en eskobiezh Gwened, distro da Zoue ar pac'hiad Yann Kermen pe "Yann Hernion", kevrinour.

#### D'an 18 a viz Here

- Gouel sant Lukaz, Abostol hag avielour, pareon ar vezeion. Gresian genidik a gêr Antiokeia e voe graet anezhañ gant sant Paol "ar mezeg karet-meurbet." Bez' e voe e geneil feal e-kerzh lod eus e veajoù abostolek hag en toullbac'h ivez. Skrivagner desket e oa hag e skrivas an trede aviel ma laka splann ennañ trugarez an Aotrou hag ivez Oberoù an Ebestel.

- E 287, merzherenti sant Just Aotsedr, bugel. Ne oa nemet nav pe dek vloaz pa voe harzet dre ma oa kristen ha lakaet d'ar marv. Kemer a reas e benn etre e zaouarn hag e kendalc'has da embann e feiz.
- Er Vvet kantved, e Roma, santez Trifonia a Roma, intañvez. Hervez an hengoun e oa gwreg an impalaer Decius pe gwreg e vab. Sebeliet eo bet e-kichen bez sant Hippolit.
- E 1562, sant Pêr Alcantara, beleg frañsezat. Heverk evit e zonezon da guzuliañ hag e vuhez a binijenn, e adreizhas ar genurzh e kouentoù e Urzh e Bro-Spagn hag e voe kuzulier santez Tereza a Avila evit he adreizhidigezh eus ar C'harmez. E oberenn *Pleustrad an orezon* a vez sellet evel ur pennoberenn evit ar vuhez pediñ.
- Er Vvet kantved, e Kolun, merzherenti santez Gwenn pe Gwennguñv (Gl. Candide), gwerc'hez e Breizh-Veur, keneilez santez Ursula.
- E Breizh, er Vvet kantved, santez Gwenn, c'hoar santez Nonna, mamm ar sent Kebi ha Kadvan, moereb sant Dewi.
- E Breizh, er VIvet kantved, santez Juveod (Yuveot), c'hoar sant Maodez, penitiourez en Henwig e Bro-Leon.
- Er VIvet kantved, sant Goezian pe Gouzien (Kn. Gwithian), tiern eus Kerne-Veur kanttroet gant sant Samzun.
- Er VIIvet kantved, sant Sengar pe Segal, tiern aet da benitiour e Breizh.
- War-dro 492, merzherenti santez Gwenna, merc'h Brec'han, drouklazhet e Talgarth gant ar Saozon bagan.
- Ar sent Brozhen ha Gwezelan (Kb. Brothen ha Gwyddelan), feizvonnourion e Kembre.
- War-dro 636, er Brabant, merzherenti sant Monon, Iwerzhonad, pirc'hirin ha penitiour e koadeg an Arden.
- Sant Lonan pe Moluanán (Lunan pe Melunan), abad en Iwerzhon.
- Santez Teaga, gwerc'hez en Iwerzhon.
- E Sant-Brieg: Treuzlec'h relegoù sant Brieg.

